

Ar c'hiz nevez – La nouvelle mode

Maria TILLY, un dintin gozh d'am zad – Pleuveur Gaoter - Miz Du 1978 (une vieille tante de mon père - Pleumeur Gautier – Novembre 1978)



Ar sul a-beure pa savis
evit mont d'an oferenn
Ha me o klevet un evnig
O kanañ e-barzh ur wezenn

*Delaliette lonla traladira
Delaliette lonla traladira*

Ha ma lâre an evnig
Ken koantig dre e yezh :
«evit ar bloaz vo difisil
Anavezout ar merc'hed kaezh

evit ar bloaz vo difisil
Anavezout ar merc'hed
Kenkoulz paour evel pinvidik
Tout e vezont digizet

Ul loeroù ruz violet
A vo war o divhar
Ur botoù marokinet
Hag i karget a c'hloar

Ur c'harkant aour pe sperles
A vo en dro d'o gouzoug
Ha dindan ma dimezell
e vo un hiviz lien stoup

Ha dindan ma dimezell
e vo un hiñviz lien stoup
Ha hi graet gant mil takon
Ha c'hoazh vo toull partout !»

*Quand je me levai le dimanche matin
Pour me rendre à la messe
J'entendis un oiseau
Chanter dans un arbre*

*Delaliette lonla traladira
Delaliette lonla traladira*

*Et l'oiseau disait
Si joliment dans son langage :
«Il sera difficile cette année
De reconnaître les chères filles.*

*Cette année il sera difficile
De reconnaître les filles,
Aussi bien pauvres que riches
Elles seront toutes déguisées :*

*Elles auront sur les jambes
Une paire de bas rouges violets,
Des chaussures en maroquin,
Et elles seront pleines de gloire !*

*Un collier d'or ou de perles
Fera le tour de leur cou
Et en dessous, ma demoiselle
Portera une chemise d'étope,*

*Et en dessous, ma demoiselle
Portera une chemise d'étope
Fait de mille raccords
Et malgré cela pleine de trous !»*